

PEDENN

WAR DON : Adoromp holl.

1

O Tad krouer ! c'houi 'gar kement ar bed-man
M'ho peus roët buhez ho Mab evitan,
Grit m'ho karimp d'hon tro eus a greiz hor c'halon,
Ha m'ho meulimp ervat en nenv dirag ho tron,
En nenv dirag ho tron.

2

O Mab Salver ! c'houi ato madelezus
'Zo 'n em c'hrët den hag a zo hanvet Jezuz ;
C'houi o peus hor prenet 'n eur vervel war eur groaz ;
Grit na vimp ket kollët, goude poaniou ker bras,
Goude poaniou ker bras.

3

O Spered-Glan ! c'houi 'ho nerz ha sklerijenn ;
Dirag ho tan e teuz an denvalijenn.
Strinkit 'n hor sperejou sklerded ho kwirionez,
Tommit hor c'halonou gant groez ho karantez,
Gant groez ho karantez.

4

O Treinded sakr ! hor mirit, korf hag ene,
Diouz ar gwall-eur d'en em gailhara morse,
Ma c'helloc'h chom ennomp, e-giz ebarz ho ti
Ha rei d'hor c'halonou ar peuc'h hag an dudi,
Ar peuc'h hag an dudi.

5


Holl draou krouet, ha c'houi holl, seif hag elez,
Meulit ganeomp an Doue a santelez,
Ra vo meulet an Tad, ar Mab hag ar Spered !
Ra vo meulet bepred tri Ferson an Dreinded,
Tri Ferson an Dreinded !

Permis d'imprimer :

P. JONCOUR, v. g.
Quimper, le 13-Juin 1930.

B...

QUIMPER. IMP. CORNOUAILLISE



WAR DON : *Emgann an Tregont.*

DISKAN :

*D'an tri Ferson eus an Dreinded
Kahomp ervat gant mil respet ;
Gloar hag enor war bep tachenn,
Gloar hag enor da virviken !*

1

Eun Doue 'zo, uhan hepken,
Krouer pep tra, krouer pep den ;
Bet eo ato, be 'vo bepret,
Ema dre holl hep harz ebet.

2

Tri Ferson 'zo 'barz e Doue,
Parfet o zri e pep doare ;
An Tad, ar Mab, ar Spered-Glan,
Doue o zri gwitbunan.

3

Doue o zri, ha koulskoude
'Rabat sonjal int tri Doue ;
Unan hepken a reont o zri ;
N'eus etrezo tamm dispart.

4

Disparti 'bet n'eus etrezo ;
N'int ket mesket evelato :
An Tad, ar Mab hag ar Spered
A jom ato gwir Bersoned.

5

Doue an Tad a zo krouer,
Doue ar Mab a zo salver,
Hag ar Spered a garantez
Eo oberour ar santelez.

6

Doue a zo eur spered pur,
Santel, santel eo dre natur,
Ha n'heller kaout en e vuhez
An distera fallagriez.

7

Galloud Doue a zo dispar ;
Ober a c'hell ar pezh a gar ;
An dud krenva en e gichen
'Zo nébentoc'h eget kelien.

8

Douar ha mor ha holz an ne
A embann skler galoud Doue ;
E hano sakr ha benniguet
Dre ar bed-holl a zo skrivet.

9

Hen eo a vlein an heol, al loar
Hag ar stered hag an douar ;
Elec'h ebet, netra morse
Ne c'hell finval hep e être.

10

Emmell a ra ouz ar paourig,
Ouz al labous hag ar peskig,
Ouz ar preñvig an distera,
Emmell a ra ouz a bep tra.

11

Klevout, gwelout a ra pep tra,
Betek an traou ar c'huzeta :
N'eus ket eur sonj en hor spered
Hag a jomfe outan kuzet.

12

Doue a zo madelezus
Hag ouz an holl eo truezus :
D'ar pecher paour, pa janj buhez,
E ro pardon ha levenez.

13

Met Doue 'zo ive leal,
Ha gwaz a-ze d'ar re 'zo fall :
Gantan pep den a vo barnet
Hervez an hent en do heuliet.

14

Bevomp ato evit Doue ;
Bezomp d'ezan korf hag ene,
Hag en nenvou ni 'vo laouen
Ouz e veuli da virviken.

Permis d'imprimer :

P. JONCOUR, v. g.

Quimper, le 13 Juin 1930.